

SESSION DE GUÉRANDE

39

MERCH AL LIENACH. — **ARBEL (PRES) RENKET MAD.** — An oll lienach a dle beza merket dre eul lizeren pe dre eur merk all bennac ervez he servich. Eun dudi eo guelet eun arbel, leun a bep seurt dillad lien, guen kan ha renket brao. Eas eo compren peguement a fogue (foge) e deus eur vrek fur o pinvidicaat e ziegez a draou ken talvoudus ha ken necesser evel al lienach.

Rouez voant guechal (gueich-al) an tyez ha ne viche (vije) ket klevet enno trous eur c'har-neza. Ar c'hosadou neud caér, krouget a stropadou ous an treust, a ziskoueze d'an holl e voa mestress an ty-ze eul labourerez vad. Hirio ar c'hiz vad-ze ne man mui enn hon touez, abalamour ma eo deuet marc'had mad al lien hac ar gloanac'h. Nec'het omp gant an dra-ze, selaouit mad plac'het yaouank, rac al lien prenet na dal ket ha na dalvezo (dalvo) biken an hini a neze ho mamou koz !

Siouldeur ho kirri-neza a ra disonjal ar garantez e doa pep Breizadez evid an dud kalounec ganet en ho bro ; en amscer m'a kaner guers Bertrand Duguesclin :

Nezit merc'het Breiz-Izel
Nezit ho kigueliet (keielat) linn
Evit renta d'ar Franç
A d'ar Spagn
An Aotrou Bertrand Duguesclin.

TALVOUDEGUEZ AR GRIAT. — Ar grierez eo al labour vella hag an talvoudusa, an hini a zo ret da eur vaouez gouzout. Dre ar grierez ec'h esperner kals traou enn eun tiegez. Eur plac'h yaouank hag e deus plijadur o c'hriat (vriat) enn emm zioual dious cals sonjou didalvez. An oll a anavez ar binvijou hag an traou all a zo ret da gaout evit griat : besken, nados, sisail, neud seiz, neud linn, neud gloan ha neud coton.

Bez e zeus pevar seurt scrafou er grierez : ar scraf var araoc, an hini var adren, ar scraf chaden, hag ar scraf merk. An daou diveza man a servich da vraoad al labour.

ALI D'AR GEMENEREZ. — Bugale, pa viot o c'hriat na blegit ket re ho corf. Eun dalc'h fall a zigaz klenvejou hag a laka ar c'horf da zivaloat ; na gemerit ket eun neuden re hir en ho nados, an dra-ze ne deo mad nemet da goll an amzer ha da derri ho neuden. Chachit buan var ho nados evit ma vez